

Kanaouen an Durzunel



Cals amzer a meus collet
 O furchal a c'hoajou,
 « Vit surpren eun durzunel
 Kousquet var a brankou
 Devet e meus ma amors,
 Ha tennet a meus fall,
 Achapet an durzunel
 Ha nijet er c'hoat all. (bis)

Dious an noz hag ar mintin,
 O clevet lapousset,
 O cana, e fredonin,
 Da vek ar gwez pignet,
 Na meus nikun anezo
 Hag a bic ma c'halon,
 Evel moes eun durzunel
 O welan d'he mignon.

Hirvoudin a ra nos de
 Gant ar boan ar glac'har,
 Evel eun intanves paour
 Kollet ganti e far,
 Ma neus nikun anezo
 Hag a bic ma c'halon,
 Evel moes eun durzunel
 O welan d'he mignon.

Petra durzunel yaouane,
 A dourmant d'ha c'halon ?
 « Kollet a meus, emezi,
 Ma fidellan mignon.

Ma ne zo chasseour
 Da ober din mervel !
 Me vervo gant a glac'har
 Da va mignon, fidel.

« Neus na zoutent, na remet
 Na consolation,
 Kapabl da zont da galmin
 Tourmancho ma c'halon
 Trec het oun gant ar glac'har,
 Mont a ran da vervel
 Mes na va varvin quet contant,
 Ma na varvin fidel.

Guelet a meus o vervel
 An durzunel yaouanc
 Dizec het ma c'halon
 Gant ar boan ann tourmant
 Eun he c'huenad diveza
 Eun deus c'hoas repetet
 « Ha ma Mignon fidel
 Raktal eo tremenet.

Melezour scler ha brillant
 Demeus a fidelite
 Ar model ar sinseran
 Demeus a garante,
 Nan, na varvin quet contant
 Ma na varvan fidel,
 Birviken na sizonjin
 Maro ann durzunel.

